

# Gerioù ar vuhez

**RKB**

▶▶ | Radio Kreiz Breizh

## FOAR

### Foar

Un anv boutin an hini eo a zo bet krouet diwar al latin feria, fieria en italianeg a-vremañ

Alies e veze graet ur foar an deiz warlerc'h ar pardon, d'al Lun neuze. Da zigentañ tout e veze liammet ar foarioù gant ar relijion evel Foar Sant Mikêl e fin miz Gwengolo e Gwengamp. Gwerzhet e veze loened enne dreistholl (kezeg, moc'h, ...).

Ur bern gerioù 'zo tennet diouzh ar ger foar :

Foarlec'h (pe Forlac'h e Lannuon), al lec'h ma veze dalc'het ar foar

Foarañ, mont d'ar foar

Difoarañ, pa vez gwerzhet traoù ha 'peus ket ezhomm deuse ken

Foarer, marc'hadour a werzh traoù er foarioù

Adfoar, an deiz warlerc'h ar foar

evel un adpardon, an deiz warlerc'h ar pardon


« Aet eo an teodoù d'ar foar » pe « gwerzhet eo bet ar moc'h bihan », pa vez den ebet o kaozeal ken

« Kas unan d'ar foar », kas un den da lusa, da vale

« Kas un den da foar an lfern », evit un den n'ho peus ket c'hoant da welet tamm ebet

« N'int ket deus memes foar », evit ur re votoù disparet (n'int ket memes re)

« An hini 'h a d'ar foar a goll e blas », 



Foarioù ar c'hezeg en urzh :

**Foar Vre,**  
d'ar bemzek a viz Eost

**Foar Vulad,** d'al Lun goude  
an 8 a viz Gwengolo

**Foar Gerien,**  
trivet Sadorn miz Here

Gwechall e veze graet foarioù betek pemp pe c'hwech gwech ar bloaz e Larruen. En o zouesk e veze graet Foar Larruen Gozh, eil yaou miz Here :

« Foar Larruen gozh 'gasa adverenn d'an noz »

### Da vont pelloc'h

Kit da selaou ar ganaouenn  
**Alla fieria dell'Est**  
gant  
**Angelo Branduardi**

peotramant ar ganaouenn  
A-benn dilun me yal d'ar foar

COPINACÉ PAR  
UNION EUROPÉENNE  
UNANIEZH EUROPA



L'Europe s'engage  
en Bretagne / Avec le Fonds européens  
de développement régional